



Nedeleg Laouen



BREIZ

NIVERENN NEDELEG

9

PRIZ : 35 LUR

Genver 1929

**K
R
O
A
Z**

TAOLENN AN NIVERENN-MAN

Deuet eo ar Zalver (Y-F. ar Falc'hun).....	Pajenn	1
Goueliou ar Miz (An Tad).....	—	3
Pajenn an Emzao Katolik (L. Bleunven).....	—	4
Gwerz ^r Nedeleg (Loeiz Fave).....	—	5
Noz sioul (Kerlann).....	—	7
Kanenn evit Nedeleg (Maodez Glanndour).....	—	8
Votateg Nedeleg (J. Seite).....	—	9
Ar Veilhade (H. Greff).....	—	11
Nedeleg va Yaouankiz (Kerlann).....	—	14
C'hoariou.....	—	16

Kornig ar Merour : L. Bleunven.

Bloavez mat (Laouenanig Breiz).

War golo an niverenn-man : "Itron Varia ar mor", gant Langleiz.

PRIZIOU :

Koumanant ordinal (eun vloaz)	350 lur
Koumanant a zikour	500 lur
Koumanant a enor	800 lur

Gwelit korn ar merour, e trede pajenn ar golo.

Kas an arc'hant da : **Mr l'Abbé Laurent BLEUNVEN**
Recteur de **Plomelin**, par Quimper (Finistère)

Skrivit sklaer hoc'h anioù, mar, plij

Koumanantit! Klaskit deomp koumananterien!

LAKIT EVEZ BRAS

1. Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn : skriva da rener Kroaz Breiz : **Mr l'abbé Jean-François Falc'hun**, professeur au **Grand Séminaire de Quimper (Finistère)**.

2. Evit kement a zell ouz Koumanantou ha profou, skriva da : **Mr l'abbé Laurent Bleunven**, recteur, **Plomelin**, par **Quimper**, (Finistère). **C. C. P. 1266.53 Rennes**, ha nann mui 21.802 evel araok.

AU MEUBLIER D'ART

Ep-Breiz

René CREACH'CADIC

21, Avenue de la Gare, QUIMPER

Téléphone 4-83


Son Musée d'Art Breton

Ses Intérieurs Anciens

Installations de Magasins

Aménagements de Cafés

et de Bars Américains



CAMIONNAGE
DÉMÉNAGEMENTS

GARDE-MEUBLES

L. Tanguy
Quimper

LA COOPÉRATIVE FORESTIÈRE

BOIS DE CHAUFFAGE

GAZO-BOIS

ACHATS - VENTES

8, Place Saint-Michel, SAINT-BRIEUC

Siege Central : 34, Place des Lices, RENNES

Téléphone 55-75

TI ar GLOAN

9, Straed ar C'higereziou, KEMPER

Gloanajou digemmesk

eus an oll ardameziou

E ti **SOUFREREZ KERNE**
E. BEGOT

13, Straed Jean-Jaures, KEMPER

Téléph. 9-33

E vez dresel adfouzel evit ar gwella goloù-koulchoug ar rodou

Gwerz a c'holoù a bep ment — labour vat, graet hep dale

"AGA"

Véritable Cuisinière à feu continu

"UNIQUE AU MONDE"



MODÈLES POUR PENSIONNATS
COMMUNAUTÉS, FERMES, etc...

Concessionnaire :

LECERF, 8, Rue Kerfenteun, QUIMPER — Téléph. 8-88

ART SACRÉ
ORFÈVREURIE
BRONZES
STATUAIRE
CHASUBLERIE

Pierre PÊCHE

14, Boulevard de Kerguelen
QUIMPER (Finistère)

Téléphone 8-10

LUNETTERIE — ORTHOPÉDIE

Diplômé
de l'Ecole
Nationale
d'Optique

DELBENN

Diplômé
de l'Ecole
Française
d'Orthopédie

16, Rue Kéréon. — QUIMPER

LE BIHAN-SALUDEN

7, Rue Kergariou
QUIMPER

VITRAUX


PAPIERS D'EMBALLAGE EN TOUS GENRES
SACS ET NAPPES EN PAPIER, FICELLES

Jean PAYAN

Dépôt : 54, Quai de l'Odéon
QUIMPER Tél. 12-88

133630

DEUET EO AR ZALVER !



NOUEL QUENOMP JOAUS OMP GLAN
GANT DIBOAN BREMAN POBL AN BET
GREOMP MELEUDY D'AN MAP BIHAN
A ZO EN BET MAN DEOM GANET (1)



EVELSE e kane hon tadou, en amzer goz, meuleudiou ar Zalver. Ni a lavarfe bremañ :

*Novel! kanomp, bezomp laouen e gvirionez,
Dinec'h ma 'z omp bremañ, tud ar bed :
Greomp meuleudi d'ar Mab bihan
A zo ganet deomp er bed-mañ.*

En eur c'hraou, war eun dornadig kolo, eur bugelig a-zo gourvezet en e vailhurou paour.

En e gichen, loened mut, ha daou zen santel hepken, Jozef ha Mari, ha n'o deus kavet repu ebet aberz an dud!

Tefvalijenn, paourentez, dienez, dismegañs... setu lodenn ar Bugelig deuget war an douar.

Perak? Bugel e vefe da dorfetourien, da laeron pe da vuntrerien?
Nann! **Mab Doue** eo, leun a c'hoar, a zantelez, a c'halloud kuzet!

Met ar bugel-ze eo ar Zalver, Salver an dud.

Deuet eo da barea ar bed diouz an **ourgouilh**, eienenn ar pec'hed, setu oa ret dezañ beza bihan ha dismegañset.

Deuet eo da barea ar bed diouz youl an **arc'hant**, eienenn ar grizder hag an dislealded, setu e oa ret dezañ beza paour.

Deuet eo da barea ar bed diouz al **levenezioù faoz**, setu e oa ret dezañ beva dioustu hervez lezennou al levenez gwirion...

Ha pegwir ar bed ne ouezo ket, ma ne vez ket lavaret splann dezañ, ez eo deuet ar Zalver gortozet, pegwir e rank an dud beza galvet dioustu da zegemer ar gentel genta, an **Neñv en em laka kerkent da ziskuilh brud ar Bugel**.

Setu an Aelz o tiskouez hent ar c'hraou d'ar Bastored : kan ha sklerijenn ar baradoz war an diwallerien-deñved! « ... Eno e kavot eur bugel nevez ganet,

...Gloar da Zoue e uhelled an neñv, ha peoc'h war an douar d'an dud a volentez vat! An holl draou a ya d'en em heul : gloar Doue, peoc'h an dud, paourentez eur bugel!

Setu ive, dizale, ar steredenn skedus en oabl, oc'h heñcha betek ar Bugelig, ar Vajed, tud desket, pinvidik ha galloudus, karget da veza testou ar baianed dirak ar Zalver.

Mab Doue a c'halv an holl, paour ha pinvidig, betek e gavell, evit kemer ouz e skouer reolennou gwirion ar zilvidigez : Heñ eo a zalvo ar bed, ha n'eus nemetañ gouest d'hen ober!

Hirio c'hoaz, ha bembez, ni hon eus ezomm — ha pegement! — eus ar Zalver.

Na kreñv eo c'hoaz en hon touez galloud an arc'hant, an enoriou, ar c'haranteziou direol, ar plijaduriou fall! Pegen kriz n'eo ket an dud an eil evit egile!

Ar paour ne gav nemet yenienn aberz ar pinvidig... Ar paour ne vag, re alies, nemet kasoni hag youl-dispac'h enep ar pinvidig...

Ar pinvidig a zo lore'h ennañ gant e zanvez... Dismantri a ra e zanvez, starda a ra anezañ etre e grabanou, epad m'emañ en e gichen lod eus e vreudeur — ar C'hrist e-unan — o vervel gant an naon!

Ar broiou bras a flastr ar re vihan en o c'horf hag en o spered... Krizder, kasoni etre ar broiou... Iazerez ar brezel a dreuz ar bed... spontailh ar brezel o sevel adarre war ar C'hornog evel e pep lec'h... Gwirio Doue dianavezet gant ar broiou : ha pa varfe ar broiou, petra ra ze, gant ma vo digristen al lezennou, gant ma vo miret ouz ar Zalver d'ober e labour!

Kristenien, sellomp ouz Bugel ar c'hraou : selaouomp mat e gentellou, skrivomp anezo doun en hor c'halonou hag en oberou hor buhez.

Silvidigez ar bed a zo etre hon daouarn, unanet gant re ar C'hrist : ma 'z eo renet hor buhez gant lezennou ar Zalver, e vezimp salverien ar bed eveltañ!

Ha dalc'homp soñj ne vez roet ar peoc'h nemet d'an dud a volentez vat!

Y.-F. ar FALC'HUN.


(1) Tannet, gant Kerlann, eus al levr koz : Burzud bras Jezuz.

Niverenn miz kerzu a oa dindan ar wask p'eo deuet deomp ar c'helou edo galvet gant Doue davetañ an Aotrou Moenner, vikel vras Kemper, d'an 11 a viz du.

An Ao. Moenner en deus stourmet, hed e vuhez, kouls lavaret, evit skoliou kristen an Eskobti : harpet en deus enep pep avell! „Eurüs ar servijer a vo kavet gant e Vestr, d'ar mare ma teuo, oc'h ober evelse!“ Setu ar c'homzou a zisplegas an Aotrou'n Eskob goude an oferenngaoñ, pa roas an dierra eus buhez e genlabourer... hag ar c'homzou gwella oant evit barn buhez ar beleg kalonek.

An holl Vretoned a bedo evit ene an Ao. Moenner, a zo bet ivez, epad e vuhez, eur mignon start d'ar brezoneg : yaouank c'hoaz er C'hloerdi, e labouras da zével strollad ar Vrezonegerien, ha dere'hel a ray d'ar spered breizat edoug e vuhez.

Korf an Ao. Moenner a zo bet beziet e Elliant, e barrez c'hinidik, d'ar 15 a viz du.



★ Goueliou ar Miz ★

25 KERZU, SADORN, GOUEL NE-DELEG. — “Gloar da Zoue... eme an Ael, ...ha peoc'h d'an dud a volentez vat...” Ya, asamblez gant an Ael, lavaromp mil bennoz da Zoue evit ar Zalver a zegas deomp; diskouezomp dezañ ez omp tud a volentez vat, o senti ouz e lezennou, hag hor bezo ar peoc'h, ar peoc'h gwirion!

28 KERZU, MEURZ, AN INOSAN-TED SANTEL. — “Sav, eme an Ael da Jozef, kemer ar bugel hag e vamm, ha tec'h d'an Egipt...” A-vec'h deuet war an douar, Jezuz a gemer e groaz evit savetei ar bed... Ha ni, e ziskibien, ne vefe nemet eur zoñj en hor spered : ren eur vuhez a blijadur! Pebez follentez!

31 KERZU, GWENER, DEIZ DIWEZA AR BLOAZ. — Tremañ a ra an amzer, pe gentoc'h, ni a dremen... Betek-hen, petra hon eus graet gant ar bloaveziou hon eus bet digant an Aotrou Doue? Ar bloaz nevez a vo marteze ar bloaz diweza evidomp... Poent eo staga da vat da labour hor silvidigez!

1 GENVER, SADORN, DEIZ KENTA AR BLOAZ. — Eur bloaz nevez adarre! Da geñver an deiz-mañ, greomp soñjezonou fur. Soñjomp pegen berr eo ar vuhez war an douar-mañ, ha pegen talvoudus eo, pegwir diouz ma vo bet — mat pe fall —, e kaso ac'hanomp da eurus-ted ar baradoz pe da dan an ifern. Kom-prenomp e ro an Aotrou Doue ar bloaz nevez-mañ deomp, n'eo ket evit beva hervez hor faltazi, met evit e zervija ha kaout eun deiz perz en e eurus-ted. Komprenomp ervat kement-se, ha stagomp d'al labour : poent eo!

2 GENVER, SUL KENTA AR BLOAZ, GOUEL ANO SANTEL JEZUZ. — „Eizteiz goude ma voe ganet, e voe roet dezañ an ano a Jezuz...” „Jezuz” a zisnif “Salver” : Jezuz a zo bet e gwirionez Salver ar bed. Roet en deus eta enor d'an ano a oa bet roet dezañ! Ni ivez, da zeiz hor badeziant, a zo bet roet deomp eun ano..., eun ano kaer, hini eur zant pe eur zantez. Betek-hen, penaos hon eus bevet, en eun doare hag en deus roet enor d'an ano-ze... pe en eun doare hag en deus taolet warnañ dismegans?

6 GENVER, YAOU, GOUEL AR ROUANED. — “Gwelet hon eus e steredenn er Zav-heol ha deuet omp d'e adori...” An tri Roue, kerkent ha galv an Aotrou Doue, a zo en em lakaet en hent. Pebez sentidigez ha pebez fiziañs!... Ni hon eus ivez eur steredenn, steredenn hor feiz, evit hon heñcha war-du Doue.



Perak 'ta beza ken alies lezirek da vont d'he heul? Savomp, pelloc'h... hag en hent!

9 GENVER, SUL KENTA GOUDE AR ROUANED, HA GOUEL AR FAMILH ZANTEL. — “Ha Jezuz a oa sentus outo...” Pep familh gristen a dle beza ivez eur familh zantel : enni kerent doujus ouz lezennou Doue, ha bugale zentus ouz o zud... evel ar Mabig Jezuz!

16 GENVER, EIL SUL GOUDE AR ROUANED. — “En amzer-ze e voe eun eured e Kana a C'hahile...” Ar Werc'hez Vari a yeas d'an eured-se; Jezuz a yeas ivez hag a reas eno zoken e vurzud kenta, o trei an dour e gwin... Daoust ha Jezuz hag e Vamm zantel a asantfe dont d'an holl eurejou a vez en hor bro? Allas! n'eo ket gwir. Lod a vez enno re a zizurz, hag a vez renet kentoc'h gant an diaoul eget gant an Aotrou Doue!

23 GENVER, TREDE SUL GOUDE AR ROUANED. — “Lavarit eur ger hephen, ha va servijer a vo pare.” Jezuz, Mab Doue, a zo mestr war bep tra, ha madeleuz meurbet. Lakomp ennañ hon holl fiziañs!

AN TAD.

PAJENN AN EMZAO KATOLIK

AR ZUL E SERVIJ DOUE

Lavaret hon eus er miz diweza oa bet lakaet ar zul war eur renk disheñvel a-grenn diouz deizioù all ar zizun.

Hogen, en eur ober kement-se, Doue en deus merket ive *peseurt implij a dliemp ober anezañ*.

Ar zul eo devez an Aotrou.

Ar pezh hon eus da ober, dreist pep tra, en devez-se, eo beza e servij Doue, da lavaret eo e rankomp e adori, kana e veuleudiou, diskleria dezañ hor c'harantez, goulenn digantañ e c'hrasou...

Sklaer eo neuze, ma tifenner ouzomp al labour, n'eo ket ma vefe falloc'h en devez-se eget en devezioù all, met abalamour ma virfe ouzomp da zeveni d'hon deverioù e kenver Doue.

Anez ar zul, peseurt plas en devefe Doue en hor vuhez?

Heñ hag a zo hor C'hrouer hag hon Tad, Heñ hag omp bemdez dleour dezañ a gement a vadoberou, petra 'roomp dezañ, e gwirionez, edoug ar zizun?

Gouzout a ran e c'hellomp kinnig dezañ labourou ha poanioù pep devez, e c'hellomp e bedi mintin ha noz, kas hor spered hag hor c'halon warzu ennañ, a vare da vare... Met ken debret omp gant soursi al labour, ma n'eo ket da gonta kouls lavaret, an amzer a roomp da Zoue.

Eur gwir gristen a gompren mat kement-se, ha setu perak e teu dezañ huanadi warlerc'h ar zul, warlerc'h an devez benniget-se, ma c'hellou terri ar jadenn e stag ouz an douar, teurel diwarnañ bec'h al labour, hag en em gaout gant e Zoue, koueza d'an daoulin dirazañ, komz outañ kalon ouz kalon.

Evit ar c'hristen-ze, ar zul n'eo ket eun devez chastreüs eo, met eun devez a joa, gortozet gant mall. Na pegen hir e vefe ar mizioù evitañ, pegen divlaz ar vuhez, ma n'en dije ket e zul!

Digant an holl, gwtibunan, en deus Doue gwir da reseo enor ha gloar da zul. Kement den a zo doujañs Doue en e galon, en deus eta an dever da implij an devez-se en e zervij.

Ar re goz, ar re glañv, ar re n'hellont ket mont betek an iliz, a gouez o unan

dindan al lezenn-ze. Ar zul a jom evito devez an Aotrou. Met gwelit amañ dioustu pegen diaes n'eo ket evito.

Peseurt gloar ha peseurt enor a c'hell pedennou, graet gant tud pec'herien, renta da Zoue? Hag e vefe milionou a dud o pedi asamblez, o fedennou a jomo atao pedennou tud...

Doue a zo ken pell diouz an den!

Penaos 'ta en em gemero hemañ evit pignat betek ennañ?

Penaos nemet *dre an oferenn*, a c'houlenn an Iliz diganeomp klevet bep sul; an oferenn hag a zo sakrifis ha pedenn Hor Zalver, hag e c'hellomp dreizi, pegen bras pec'herien ma 'z omp, en em unani gant hon Doue, renta d'hon Tad holl-c'halloudek pep enor ha pep gloar.

Ne bouezan ket, lennerien ger, rak tro ho peus bet da lenn e Kroaz Breiz, n'eus ket pell c'hoaz, diou gentel diwar-benn an oferenn.

An oferenn eo brasa teñzor hon eus, er bed-mañ; hag ar c'hristen a c'hoantaio enori Doue e giz ma 'z eo dleet, ne c'hellou ober morse netra gwelloc'h eget kemeret perz enni hag en unani ganti.

Soñjomp neuze ive n'eo ket teurel eur zamm warnomp eo a ra an Iliz, pa c'houc'hennomp deomp klevet an oferenn da zul, ha d'ar gouelioù berz, met *renta eur zervij dispar deomp* eo a ra, en eur rei da bep hini ac'hanomp eun doare peurvrat da enori Doue.

An Iliz ne fell ket dezi chadenna hor frankiz. Ma c'houlenn diganeomp klevet an oferenn bep sul, dindan boan a bec'hed, e lez ganeomp frankiz evit *an ofisou all savet ganti*.

Met pegwir e rankomp beza e servij Doue da zul, an Iliz a deu amañ c'hoaz d'hor sikour. Kinnig a ra deomp ar gousperou, bennoz ar Zakramant, ar prosesionou, a zo evel ken alies a baze-nou da dostaat ouz Doue. Evit maga hor feiz hag hor c'harantez, e ro ali deomp c'hoaz da gemeret pennadoù amzer da bedi, da lavaret hor chapeled, da lenn kement tra a c'hell trei hor spered hag hor c'halon warzu Doue.

(Kendalc'h pajenn 7)

GWERZ NEDELEG

Bez' e oant daou vreur, daou grouadurig. Mont a raent war an hent, habask ha sioulik. Daou vugelig bihan, warno tres ar vizer, a gerze war an hent e kreiz ar sioulder. An avel a yude, an amzer a oa kriz, ha war o c'horf paour, ar vugaligou geiz n'o doa evit harpa ouz ar skorn hag ar riou, nemet eun tamm bragez marellet a bep liou. Eur jupenn kals re verr hag eur jiletenn baour a oa war o c'hroc'hen eur gwiskamant dizaour! An douar gant an erc'h a oa goloet gwenn, ha daoust d'ar skorn skrijus e kerzent diarc'hen... O bleo a oa hir. O dremm du ha teñval a verke an anken, skrivet mat war o zal...

Mont a raent dorn ha dorn, a-hed an heñchou bras, o c'houlenn ouz an dud, dre o daoulagad glaz, eur merk a garantez, eun tamm bara bennak. Piou 'ta 'roio dezo ar pezh emaint o klask? Tost an eil d'egile e talc'hent mat ato 'vit miret ouz ar riou da gregi re enno. Frañsa, 'n hini kosa, gant eur zell truezus, a c'houde e vreur a oa gwall c'hlac'harus : rak biskoaz er bed-mañ, daoust m'en devoa seis vlâ n'en doa gellet tañva ar joa an distera.

Set' amañ eur maner : skei a reont war an nor :

ha pa voe digoret, e weljont er goudor eun niver bras a dud : ruz-tan eo o dremmou. Friko 'zo war an daol : plajou ha boutailhou, netra ne vank dezo : hag e kreiz an aoled e sav, o flamind, eun tantad benniget... Raktal eur vouez c'haro a glever o sevel : " Mac'harid, petra 'rit? Amañ 'teu an avel! Serrit buan an nor, ha deuit d'hor servicha! — Itron, daou vugelig 'zo o c'houlenn bara : astenn a reont o dorn hag e rankont krena, gant an avel a c'houez hag an erc'h o koueza. — Skubit 'nezo er maez. N'eo ket hirio an deiz da zont d'hon direnka da vare ar c'hreisteiz! Azezet omp ouz taol : ne c'hellomp ket selaoz an holl ardigelled a deu war hon treujou. Ra 'z aint 'ta d'eul lec'h all da glask an degemer, amañ n'eus ket a blas da loja ar vizer! "

An nor a voe serret : n'oa netra evito : netra nemet an naon, ar riou, an erc'h, ar glao. Naontek kant vloaz a zo hag eiz a daou-ugent, d'an Nedeleg kenta, pa deuas er bed Mab-Den, da zaou bried yaouank, da Jozef ha Mari, oa lavaret ive : " n'eus ket a blas em zi!... "

O kendalc'h gant o hent, an daou vreur gwalleurus A zec'he an daelou diouz o daoulagad ruz. Re bounner eo ar vuhez : n'hellont dougenn o zamm, samm o c'horf skornet o c'houlenn eun tamm ehan... Fiziañs, bugaligou, kendalc'hit gant hoc'h hent; Hirio, deiz Nedeleg, ez ay an dud d'ar Pellgent; Hag ar Bugel doueel, kousket war ar c'holo, a ouezo moarvat, e pep kalon c'haro, dihuna a -nevez ar garantez kristen hag a wel Hor Zalver dindan skeud pep den.



Kerzout a reont eta dindan an avel yut,
tost an eil d'egile, e chomont evel mut :
rak petra ' lavarint? Er vizer int ganet,
ha douster ar vuhez-mañ n'o deus morse tañvet.
Heñvel ouz eul labous kollet gantañ e neiz,
emalnt war an heñchou, ar vugale geiz,
Hag e kerzont atao, mont a reont pelloc'h :
eus a bell e teuont hag ez eont larkoc'h.
N'eus ger kenetrezo : gwelloc'h ez eo rei peoc'h,
ha dougen ar vizer : netra ne zervij deoc'h
klemm ha klemm bepred ouz ar vuhez garo...
Warc'hoaz, marteze, an heol skedus 'baro!

Meur a wech e skoont war an doriou serret,
met ne deneraont ket ar c'halonou sklaset.
Ar pezh a zo bet graet da Vab-Doue gwechall
a vez graet atao : an dud a jom ker fall!
Mignoned Hor Zalver, ar vugaligou baour,
gant an dud pinvidik, o krabana aour,
a vez taolet er maez, vit mervel gant an naon :
den n'en do truez outo pa 'z aint da Anaon.

An daou vugelig a gendalc'h o beaj,
hogen an avel biz a skarnil o bizaj...
Raktal, en eur c'hroaz-hent, e welont dirazo
eur skeudenn a-wechall, tarafet gant ar glao,
eur skeudenn vuzudus : tri den, soun en o zav;
warno 'c'houez an avel, an erc'h ha kement tra...
O dremm 'zo truezus, hag e korn o lagad,
'vel daelou glac'harus a vez gwelet sklaer-mat.
An hini 'zo e-kreiz a zo stag ouz ar groaz,
hag ar riou skiltrus a grog en e gorf noaz.
E c'henou damzigor hag e benn kostezet,
e zaouarn staget mat hag e galon toulllet
a lak war an den kaez dremm disliv an Ankou.
O! an dra druezus : skuilhomp puilh hon daelou!
Ouspenn, er c'hostez dehou, eur vaouez ankeniet
a bok gant karantez d'ar groaz venniget :
moarvat ez eo ar Vamm o veilha war he Mab,
o c'houlenn digant Doue hen degemerout mat.
Hag ouz ar c'hostez kleiz, dremm eun den yaouank glan,
karet gant Hor Zalver, hag a anver Sant Yann :
heñ eo ziskuizas war galon Hor Zalver,
pa roas d'e ziskibien Sakramant an Aoter.
An erc'h hag an avel a skoe war an tri den,
a jome em o zav, daoust d'an amzer yen.
Fañsa hag e vreur bihan a zell outo gant truez,
Da Jezuz stag ouz kroaz e roont o c'harantez.
— " O! na riou a dleont kaout, a lavar ar c'hosa!
— O ya! muioc'h eget-ne, eme ar yaouanka! "

Dirak an daouig-se, ne gomprenit hu ket
perak Jezuz gwechall, pa 'z edo 'barz ar bed,
a lavaras eun deiz, d'e ziskibien garet :
Me 'gar ar vugale, me gar o holl glanded;
ho lezit 'ta da zont : dezo eo an neñvou,
dezo ha d'ar re holl o deus o mennoziou "

Sounnet o izili, an daou vreurig bihan
'azezas war ar groaz evit ober eun ehan...
An noz a gouezas buan : ar vugale 'gouskas;
an amzer a oa sklaer : ar stered en oabl glas
a lugerne skedus, a-us d'an daou vreurig,
a oa morvitellet heñvel ouz daou vroc'hig.

Neuze Salver ar bed 'zigor e zaoulagad,
hag e lavar d'e Vamm : " Setu amañ daou vab

a zegasan deoc'h-c'houi, o va muia-karet.
Din-me ez int breudeur, ha deoc'h-c'houi mibien ger.
Kemerit anezo, hag o c'hasit d'am c'hêr,
rak plas a zo dezo e palez an Dreinded. "
Ar Werc'hez 'zispakas he mantell a berlez,
evit gelei mat he daou vabig nevez.
O c'has a reas ganti war-eün d'ar baradoz,
da zeiz an Nedeleg, pa zonas hanternoz.

Loeiz FAVE.

NOZ SIOUL, NOZ SANTEL

Ton : " Stille Nacht " pe " O douce nuit "

I

Sioul an noz, santel an noz.
Kousket eo
pep tra vev.
War ar mēz 'mañ an Elez
holl o kana asamblez,
'us d'o fenn eur steredenn (2 wech).

II

Sioul an noz, santel an noz.
An holl dud
a jom mut.
'tre an azen, an ejen,
war ar plouz en eul lochenn,
gant eo Hor Zalver (2 wech).

III

Sioul an noz, santel an noz.
Deuomp holl,
Kanomp holl,
d'ar Vamm zantel, d'he Bugel,
Jezuz o paouez genel,
bennoz ha levez (2 wech).

IMPRIMATUR :
Kemper,
22 a viz du
J. COTTEN.
Wikel-vras.

Kerlann (1944).

PAJENN AN EMZAO KATOLIK

(Diwez)

Na lavarit ket eo aze gouleann re. An
hini ne ro da Zoue nemet dres ar pezh
a zo dleet dindan boan a bec'hed, a deu
buan gantañ an deiz ma ne ro ket dezañ
zoken ar pezh a zo dleet.

Ar wirionez eo ez eo yen hor c'halon
evit Doue. Pa vez meneg da bedi, da
jom en Iliz, e teuomp dioustu da skuiza.
Pebez dallentez! Chom euriou hag euriou
ouz taol, da gonta kaoziou goullou, -tre-
men devezioù o labourat, ne gavomp ket
hir hon amzer! Met nebeudik e pado
eun ofis, eur bedenn, setu ni o klemm,

inouet maro : " Aotrou, a lavare eun
itron d'eun Eskob, re hir e vez an ofisou
ganeoc'h! " — " Itron, a respontas
hemañ, ha n'eo ket ho tevision deoc'h-
c'houi a vefe re verr? "

E lec'h ma ne vez ket eun tamnig
poan, ne vez ket a garantez. Ma ne ouzit
ket en em ziaeza an distera evit Doue, eo
ar merk n'her c'harit ket kals. Met gant
piou hag e pelec'h emañ neuze ho kalon?

Ma vijemp gwelloc'h kristenien, m'hor
bije eneou karantezus, ni lavarje gant
ar jeneral a Sonis : " N'am eus kavet
biskoaz re hir eun ofis : gant keuz am
eus atao kuitaet an iliz! "

L. BLEUNVEN.

KANENN EVIT NEDELEG

Moderato *crescendo* Tonet hag eillonet gant Y K.

mf D'an Tad en neñv, a greiz e-ne, ren-tomp ben-noz
 'vit an noz se Ma 'z eo bet glan e verb ganet, eus
 Kor ar Ver-chig hien-ni-get ka-nomp laouen Glo ar d'an
DISKAN
mf Tad, Peoc'h, en dou ar d'an holl dud vat

I
 D'an Tad en neñv, a greiz ene,
 rentomp bennoz 'vit an noz-se
 ma 'z eo bet glan e Verb ganet
 eus korf ar Ver-chig benniget.

DISKAN ()*
 Kanomp, laouen, gloar d'an Tad,
 Peoc'h, en douar, d'an holl dud vat!

II
 Ya, meulomp hael (I) gant an Aeled
 ar plac'h illur (2), dinamm furmet,
 he deus roet d'an holl vedou
 Jezuz, c'hoantad ar broadou.


III
 O Mari pur, leun a furnez,
 gwenn evel erc'h, bepred' gwerc'hez,
 drezoc'h hepken eo diskennet
 ar Roue kreñv, eus an neved.

IV
 Deomp 'ta gant meul d'e azeuli (3) :
 setu ma teu d'hon dieubi;
 Mabig dibec'h, eus hor pec'hed,
 gantañ dre c'hras omp dilaset.

V
 D'ar Mab espar 'zo deomp paret
 hirio er c'hig, Doue benniget,
 evel d'an Tad a vadelez
 ha d'ar Spered Glan, karantez.

Amen.
 Maodex GLANNDOUR.

(1) hael = dizamant ha gant doujanz.
 (2) illur = leun a vrud.
 (3) azeuli = adori.
 (*) An diskan, slouaz, n'eo ket eus pluenn M. G.



VOTADEG NEDELEG

En nozvez-se, goude eun tammig beilhadeg en dro d'eun tantad tan, holl dud an ti a oa kousket c'houek... Goude daouzek taol an hanternoz, pa n'oa trouz ebet ken en ti, nemet bep an amzer eur roc'haden bennak o tont eus ar gweleou, e seblantas dihuna pep tra en ti hag en dro d'an ti, pep tra nemet an dud.

An hini a vije bet war zihun, en dije gwelet ha klevet ar pezh n'en deus biskoaz klevet na gwelet... Sclaouit kentoc'h.

Ar Mabig-bihan, o welet pegen nebeud eo chalet lod eus an dud gant noz Nedeleg, ha pegenent a jefichamant o deus degaset er gouel-ze e keñver ar gizioù koz a oa ker c'houek d'e galon koulskoude, a deuas dezañ eur zoñj : goulenn o ali diganto : « Ya pe nann, ha karout a reont atao noz-Nedeleg? »

Ar c'hiz a zo deuet bremañ da voti evit nebeutoc'h a dra, ha ret eo beva gant an amzer, na petra 'ta!

Setu m'en doa savet, hervez ar c'hiz, daou c'houenn, ha « ya pe nann » a oa da respont evito :

1. Ha bez' emaoe'h evit dere'hel da c'houel Nedeleg?

2. Ha c'hoant ho peus da zerc'hel d'ar gizioù a wechall-goz, war ar poent-se?

Ar Mabig-bihan, gwechall, en doa lakaet n'eo awalc'h pennou bras an Doktored o-unan, gant e skiant disheñvel ha n'en doa ket prenet sur awalc'h digant an dud. An hevelep skiant e lakas adarre da zoñjal disheñvel diouz an dud : « N'eo ket digant ar re-mañ, a lavaras, eo din goulenn o ali : alies awalc'h e rankont c'hoaz voti; awalc'h o deus bet moarvat! Mar d'efe gwelloc'h an traou ganto c'hoaz goudeze!... Gwelomp eus eun tu bennak all! »

Setu ma lakas da voti kement tra a oa en ti hag en dro d'an ti, dor, armeliou, chatal, ki ha kaz hag all.

Ezomm ebet da zeski d'ar re-mañ penaos en em gemer evit voti : alies awalc'h e oa bet komzet dirazo diwarbenn ar voterez, evit piou voti... An hini n'en doa ket komprenet a-benn neuze, ne gomprenfe biken!

Diaes awalc'h eo avat rei da gompren penaos e tremenas an traou. Setu amañ eun diverra eus an abadenn.

Kerkent ma savas ano da voti, e stagas ar bodadegoù e pep ti : Sent koz Breiz-Izel a heulic gant evez an divizoù, eus sioulder ar baradoz. N'eus fors piou a c'helle, ma kare, kemer ar gaoz, troad forc'h hag all, pa vije a-du pe a-eneb... An urz vat a rene atao, e-lec'h gant an dud e vije bet, pell 'zo, krogadou pe taolioù dorn... Hini ebet ne veze taolet er maez, he n'eo ket diaes her c'hompren, rak an nor war ti ar votadeg a veze atao morailhet d'an eur-ze... Ar sklaseñn-vras, a-us d'ar siminal, a zalc'he e kement ti ar plas kenta, ar plas a enor, hag a rene an tabud. Dibabet oa bet e kement lec'h evel Rener, abalamour ma lonke ha ma tisonke dioustu mennozioù an holl : gouzout a raed ive ne dommfe ket buhan ouz gor an tabud.

An horolaj he doa klasket ive kaout ar plas-se, met an daol a enebas : « Hounnez he deus mennozioù re en araok d'ar re all : dek munutenn d'an

nebeuta ez a beindez war araok! » Ar gador, en eur jilgammat war he diwesker; a dostaas evit rei skoazell d'an daol, met en eur boueza war eun digarez all : re alies e veze an horolaj warlerc'h.

Eur fourchettezenn, anavezet a bell 'zo evit beza lemm he beg, a lavaras : « Hounnez, n'eo nemet eur ranellerez! Atao emañ ganti ar memes son. »

Eur verenn, en armel, a stirlinkas o c'hoarzin...

Renket pep tra, pep hini a stagas da rei an digareziou en doa evit voti « ya pe » « nann ».

« Me 'zo evit « ya, ya », eme ar siminal, hag amañ oun sur da gaout ivez mouez an aoled. »

Gant eur genou evel hini ar siminal, gouest da lonka meur a zousenn anduilh, ha zoken eur pemoc'h en e bez, oa diaes kaout ar ger diweza.

« C'houi oar ervat, emezañ, n'oun ket evit dilezel an tammig laouenedigez am eus e nozvez Nedeleg : gwelet dremm laouen ar vugaligou en dro din diouz ar mintin, o tridal dirak ar braoigou a gavont en o bouteier... Ret eo dere'hel d'ar giziou koz, na petra 'ta! »

— Se a zo gwir, eme ar bouteier, lod anezo o klochal ken ma strakent. Evidomp-ni, noz Nedeleg a zo eun dra gaer. Goude beza ruzet ha diruzet war bep seurt heñchou, stlabezet er pri hag er vouilhenn, ne gav ket deoc'h eo plijus beza, evit an abardaez-se, frotet ha difrotet, koaret evel eur melézour, ha lakaet goudeze e korn ar siminal, da domma ha da zegemeret, e-lec'h eun troad kasaüs d'ar fri, a bep seurt madigou? — Ha c'hoaz, war ar marc'had omp bet gwall lakaet abaoe ar brezel, hag eo ret gortoz pell evit kaout da vat an diskuiz! »

Ar votez a gomze evelse a zigore bras he genou, ha ne zoñje ket c'hoaz ehana da orogellat...

« Er maez eus ar gomz ez it, a droc'has kerkent ar gontell! Peoc'h! C'houi 'zo evit « ya, ya »; me ive! Rak en devez-se marteze am bezo muioc'h a gig da droc'ha, evit levenez ar staoñ...

— Me 'zo ivez a du, eme ar fourchettezenn : e giz-se, am bezo eun dra benyak a zaourus da grabanata etre va skilfou! »

Cholori a zavas neuze en tu all d'ar voger. « Muntrerien, muntrerien! » Al loened oa, a zave o mouez evit en em glemm.

« Me lavar « nann, nann », eme ar pemoc'h. Nann! Rak abalamour da beseurt sant n'eus nemet an azen hag an ejen e kraou ar Mabig-bihan? Sant Ke ma vije eur gwaz, a jeñchfe penn d'ar vaz! Nann, a lavaran c'hoaz, rak gouzout, a rit ervat e vez graet alies fest ar pemoc'h wardro Nedeleg, hag an dra-ze a goust ker din-mie, va buhez, siouaz! »

— « A zo mat, eme an tach, treut-gagn. Evelse eo e rankfed ober d'ar re a zo o larda diwar goust ar re all! »

An ouad, hag a zo lakaet e renk ar re zot, a voe a-du gant ar pemoc'h « Pa vez komz ouzin, emezañ, eo evit va laza! »

Eur c'hilhog, yaouank ha tener, a lavaras :

« C'houi c'hoaz, n'eo ket fall deoc'h! Evit ho prena, eo ret kaout eur bern bilhiji; evidoun-me avat a zo graet ar stal ganen! »

Ar c'hi hag ar c'haz, en em glevet o daou evit eur wech, a respontas :

« Fiziañs hon eus, emezo d'ar c'hilhog, eo mat da gont, ha gwelloc'h c'hoaz da eskern da lipat! »

Ar sklasenn vras, ker yen ha biskoaz, a lavaras neuze :

« Peoc'h! Ar gomz a zo d'ar gador-vrec'h : pemp munutenn a zo eo savet ganti he brec'h evit goulenn komz! »

— « Me 'zo a du, emezi; an tad koz a zeuio da azeza warnoun, hag a gonto d'ar vugaligou istoriou, eun drugar o c'hlevet. »

— « Bevet Nedeleg! eme al lechefe. En deiz-se, e vin lardet mat gant amann druz, genou hag all. »

Eteo koz Nedeleg a zavas neuze e vouez, eur vouez toc'hor :

« Devi epad beilhadeg Nedeleg eo va buhez! N'oun ket evit miret da zaouri ar blijadur a rin, en devez-se, d'ar re a dommo en dro d'in, laouen o welet ar flammou o lipat ac'hanoun, betek koueza e ludu. »

Ar gastolorenn a stirlinke gant joa o soñjal e vefe kempennet evit an devezse betek strinkal ar sklerijenn a bep tu dezi...

Bolomigou ar c'hraouig a vez savet bep bloaz en ti, ha bremañ serret en deñvalijenn e korn eun armel, a lavaras « ya ».

Ar c'hezeg hag ar chatal-korn, a-du evel just, a c'houriche hag a vleje gant joa : en nozvez-se, hervez, ar c'hiz, o dije eun askoan, evel an dud...

Poent oa troc'ha berr, hag echui; ar mintin a dostae, hag arabat na oufe den ebet seurt eus ar vodadeg, rak an dud a zo ker sellus ha ker sot ma c'hellfent dont da lakaat ar freuz hag ar reuz el lec'h ma n'oa nemet urz vat.

Ar sklasenn a zastumas c'herr gomzou divizou an holl.

« Lod, emezi a zo chomet hep rei o ali, gwasa-a-ze evito. Karet am bije, koulskoude, kaout mennoz an dañvad, a zalc'h eur plas ker bras e kraou Nedeleg... Ne daly ket ar boan astenn an diviz : ne c'hellimp tenna dioutañ netra ebet... Eun dra a zo sklaer : muioc'h kals a zo a-du eget enep ar gouel. Gouel Nedeleg a gendalc'ho eta. Bevet gouel Nedeleg! »

Da ziskouez o asant, plenkin al leur-zi hag an arrecubeuri a strakas : « Emañ ar c'hoad o labourat », eme ar re goz en o gweleou.

Ar vugaligou, en o huñvreou, a zoñjas : « Ar Mabig-bihan eo, o tont da ober eur bale, da welet ar plas, araok diskenn gant e banerou! »

Bugaligou! Dezo noz Nedeleg a zo kaer ha laouen! D'ar re vras ivez, rak eun Doue a zo deuet er bed-mañ evit an holl, bihan ha dimerz en eur c'havellig plouz, du-hont e kraou Betleem!

J. SETTE.

Ar Veilhadeg

E KERWENN, WARDRO AR BLOAVEZ 1900


(An eurvat hon eus da loc'hat amañ gant eur renkennad pennadou diwar-benn an doare beva war ar maez, dem-dost da Landi, bremañ ez eus hanterkant vloaz. Ar re goz etouez lennerien Kroaz Breiz a gavo enno, saour o amseriou yaouankiz; hag ar re yaouank a gompreno, gwelloc'h, dreizo, penaos o deus bevet o zud hag o zud-koz, en eur vuhez hag a oa kaletoc'h eget bremañ : eul liamm muioc'h a garantez a vezo evito gant ar re o deus poaniet war zouar hor bro.)

Soñjet hon eus e vefe kaer, e niverenn Nedeleg, loc'hat gant ar veilhadeg, chomet c'hoaz beo en hon touez en noz-vezioù-goañv).

Ti bras ar Gerwenn a zo leun chek, leun a goueriated dastumet er goudor hag en tommder.

Er maez, an noz, hep mar ebet! Klevet e vez an avel o sourral, hag, a vare da vare, barrou glao ha kazeroc'h o skei war gwer ar prenestr. Eun nozvez teñval ha kriz!

Amañ e tiskuizer goude an deveziad labour. Diskuiza, tomma, a vez graet bep pardaez, muioc'h pe nebeutoc'h. Beilhadeg hir, gant c'hoari, ne vez



nemet diou wech ar zizun : da verc'her ha da zadorn d'an noz.

Pep hini en deus lakaet kolo fresk en e voutou koad, ha torc'hou foenn warnezo : tomm eta d'an treid, ha dizoursi ar baotred!

En dro d'an aoled, o kelc'ha eun tantad graet gant lann, Saig ar Prajer,

gant e gordennad prajerien, a zo o sec'hi o dilhad, gblebiet a-hed an deiz. Divogedi a ra o bragezeier eus an traoñ : gwell'-a-ze d'ar c'hig ha d'an anduilh, renket evit mogedi, a istri-bilh er siminal ledan.

War an daol, an dominoiou a strak : pevar c'hoarier a-zevri, daou o c'hedal tro, re all o sellet...

Ar merc'hed a ya hag a zeu : o tistalia, o peñselia dilhad pe oc'h ober stamm...

A-us d'an daol, eul letern, stag ouz an treust, a zo war elum. Sikouret gant tan an aoled, e skign awalc'h ar sklerijenn evit lakaat da lugerni ar gweleoù kloz : a-gleiz, tri pe bevar anezou, hed-a-hed ar voger, eur skaon hir dirazo; er c'hostez all, gwele ar mestr, lakaet a-dreuz, kein-ha-kein gant eun armel, evit kloza etre an nor hag an apotistaol.

Nebeud a c'her a glever gant ar c'hoarierien, betek an dominoenn ziweza. Neuze avat e sav eur bern cholori :

— “Perak an diaoul az peus dal-c'het da bar-bide?”

— “Ha te, deskard, te a dlefe beza krouget da zoublenn evit rei din-me ar penn a c'houec'h!”

Keuz diwarlerc'h! Ha skiant prenet! Unan eus ar c'houniderien a gemmesk an dominoiou, hag e stagor adarre gant kals evez... Daou wenneg a vo d'ar re a c'hounezo daou daol diouz renk.

Bremañ, Soaz, mestrez an ti, a deu ive da c'hoari : eur jikolodenn goant ha seder, daou-ugent vloaz bennak dezi. Lakaet ar vugale darn en o gwele, darn en o c'havell, gwriet eur roched pe zious... bremañ e c'hell rei eun tamm amzer d'ar vevelien ha d'an amezeien. Gant plijadur her gra : n'emañ-hi ket hep gouzout e vezo lorc'h enno; hogen ne glask nemet hada levez en dro dezi.

Er memes amzer e tiskuizo eur pennad, ar pez ne c'hoarvez ket alies : intañvez, gant seiz a vugaligou, eun tiegezh a hanter-kant devez-arat, gwall grogat eo d'eur vaouez, zoken pa deu skoazell dezi.

Ha dont a ra, e gwirionez. A volentez vat, kerent he gwaz a zired eus Lanhouarne pa vez bec'h labour. An diou verc'h kosa, skoliet a zoare, a ro

hiviziken dorn d'o mamm. Ha, dre c'hras Doue, he zad Per a jom ganti : biskoaz tad ha merc'h n'int bet kae-roc'h unanet a galon.

Per en deus kemeret ar stur e Kerwenn, da varo e vab-kaer. Daoust d'e zek vloaz ha tri-ugent eo gouest c'hoaz : eur mailh a zen, bras ha ledan, yac'h ha kreñv evel eun derwenn.

Ar mestr en deus e gador e korn an aoled : azezet eno, e firbouch an tan gant e vaz, en eur gonta istoriou, hag en eur lakaat ar marvailhou da vont en dro, dreist-holl pa vez tud a ziañvaec'h.

Hogen, Saig ar Prajer ne deu amañ nemet eur wech ar bloaz, goude beza redet dre ar vro, a-dreuz hag a-hed.

“Er blaz-mañ, emezañ, am eus graet foenneier nevez e Kerne. Dal-c'hmat, war va micher, eo talvoudus kenteliou ar Senatour koz!”

— “Ar Senatour koz! Ar Soubigou! Va mignon oa, a lavar Per. Pa dre-menan e Gwineventer, ez an atao war e vez. Hast am bez da welet eno e zremm kizellet er maen, gant ar vruched digor, ar jupenn, an turban... heñvel buhez outañ, e giz ma veze amañ hag e Paris...”

Neuze, an istor goz a zispak a nebeudou : ar vuhez e Sant-Servez, p'edo Per o sevel; e gerent, e Leslem, abaoue n'oar den pet kant vloaz; e dad, Yann-vihan, n'er ar barrez, o tibuna gwechall amzer an Napoleon koz, rak tri eus e vredeur kaer, act da vrezel ar Rusi, n'ont ket deuet en dro... D'an ampoent e veze kanet alies an “Te Deum”, dre urz, warlerc'h kement trec'h er brezel; hag an dud, glac'haret, a lavare kenetrezo :

“adarre eo bet kanet, tud deomp!”... E dad koz, Yann-vras, m'er edoug an Dispac'h bras : eun amzer reuzeudik meurbet; an eurvat en doa bet da zistrei, beo, eus prizon Brest d'eur mare a lazerez didruez... War ar paperou koz, ez eus c'hoaz meneg eus gourdadou ali, tremen daou-c'hant vloaz diaraok...

War an distera goulenn, Per a gendalc'h :

Ni 'zo bet pemp breur ha c'houec'h c'hoar. Torradou evelse a zave niverus dre hor parrezioù : paotred ken nerzus an eil hag egile : ar re varreka, me gred, da zacha war ar perch pe da zougenn ar c'hravaz.

mene treuz daou bark diouz hon ti. Eno, e Kerivin, edo “relai” Per Bobbe : tud ha loened, redeurig (1) ha “malle-poste” a rae eno o diskenn. An ostiz, Per Bobbe, oa va faeron. Setu perak, muioe c'hoaz eget an ailhoned all, me, ar filhor, am boa tro da c'henaoui o sellet ouz ar roulaj, ar c'henwerz, ar brenerien-dud, ar vea-jourien, ar valtouterien, ar zoudarded, ar marc'hadouzeziou a bep seurt...

“Abaoue, ar c'horn-bro en deus cheñchet doare! a gendalc'h Per. An hent-houarn a zo deuet. Gwelet am eus strolladou tud, diredet a bell, sebezet o welet eur marc'h-du ken kreñv ha ken difre.

“An darempred a zo aet war an hent nevez, digoret etre Landi ha Landerne, war ribl ar ster... An hent koz, damzilezet, a zo bet strisaet.

“Pebez nevezentioù! Ar bed a dro!

“Ti Bobbe a zo dirapar : ar c'hre-vier, neuze leun a gezeg, a gouez bre-mañ en o foul. An drez hag ar strouez a c'holo al liorzou, ken kaer gwechall. Iliz Pont-Krist, e lec'h ma 'z aen alies d'an oferenn-vintin, dre vaner Brezal, e-teid al lenn, a zo ivez e dis-mantr : Pont-Krist n'eo mui parrez!

“En eneb, Sant-Servez a zo deuet da veza parrez, distaget m'eo bet diouz hini Gwineventer.

“Per Bobbe, va faeron, a zo dam-ankounac'haet. Evelkent ar brud a

jom, hag a jomo, eus e vab bihan, Yann Arc'hant, abalamour d'an tao-lennou dispar en deus livet, kouls e Iliz-veur Kemper eget e Sant-Houar-don Landerne.

Brud al labourerien douar n'eo ket kollet kenneubeut : o anaioù, o lesanoù a zo dotiget bepred en hon touez; en o bugale vihan e seblant beva ar c'hentadou.”

Pep hini a zelaou gant plijadur, hep gwelet ez a buhan an amzer en dro... Per avat a jom eveziant.

— Allo, va zudou, poent eo mont da gousket!

“N'eo ket yac'hus beilha pell,

Sevel mintin a zo gwell.”

War eun taol-konterezh eo echuet an abaden domino. Cheun, gant e bar gwenn eo ar gounider adarre.

“Gwella-a-ze, a zofj Soaz : hennez a vez berr ar butun gantañ alies!

Amezeien ha mevelien a guita a ti, en eur starda o zokou war o fenn. Kimiada a reont en noz teñval-sac'h, hag e klever : “ware'hoaz ne vanko ket an dour er prajou!”

— “Gant ma ne gouezo ket re bounner war hor c'hein”, a respont Saig ar Prajer.

“Noz vat!... Noz vat!... Kenavo disadorn!”

H. GREFF.

(1) redeurig = ar c'harr a rae servij ar vea-jourien gwechall. (e galleg : “diligence”.)

AR WIRIONEG E GENOU AR VUGALE.

Perig a zo bet e gouel ar “Sainte-Enfance”, gant e dad.

Klevet en deus displega stad truezus ar vugale er broioù-mision. Pa 'z eo distor d'ar gêr, e vamm a c'houlenn digantañ :

— Neuze, Perig, kals plijadur! peus bet?

— Ya, mamm! Eun dra, avat, am eus da c'houlenn diganez.

— Petra 'ta?

— Daoust ha gwir eo n'o deus ar Vorianed bihan bragez ebet?

— Sur n'o deus ket! Met perak e c'houlennet an dra-ze?

— Abalamour “Tad” en deus lakaet eur vouñtounenn er plad evit ar egst!”

GWASOC'H-GWAZ!

— Me, eme Ber, am eus eur wreg hag a zo piz, piz-raz, ne gredfec'h morse! Rebec'h a ra din zoken betek an dour a evan!


— Eur pez kaer, eme Jakou, dezañ eur zivienn ruz, hag anavezet evit e zac'hadou. Va gwreg-me a zo gwasoc'h c'hoaz : rebec'h a ra din an dour na evan ket!

Y. T.

KENDA'LCH “TENZOR AN DINTIN GOZ”

GANT AB. SULIO

E VO KAVET EN NIVERENN 10



Nedeleg va Yaouankiz

D'AR mare-ze né oan nemet eur c'hrennardig a nao bloaz, o chom e Montroulez, e ti va mamm.

Tostaat a rae Nedeleg. Ar staliou e kêr a oa leun a c'hoariellou hag a vadi-gou. E ti Gritig Pinvidig, e traon krec'h Plouyann, kouls hag e ti Katrin, en nec'h, e oa lakaet e gwerz mabigou-Jezuz e sukr, gourvezet war eur gwelead plouz, o divrec'h astennet ha digor... Goulaouennou bihan e koar, re ruz, re velen; re wer, re c'hlas, a oa ker braoik da welet, ker flamm all, hag heñvel ouz madigou, m'ho pije bet c'hoant d'o c'has d'ho kenou evit o zuna... Stere-dennou arc'hant hag aour, neudennou "bleo an Aelez" a fiche ive, diouz an druilh, ouz ar c'hrevierigou Nedeleg.

Gant kement all a draou da c'henaoui outo e voe tapet meur a hini ac'ha-nomp o tegouezout re ziwezat er skol, pe re ziwezat er gêr warlere'h ar skol.

Nedeleg! Er skol, anat, ne oa ken kaoz war ar porz-c'hoari : "Petra 'vo lakaet dit en da votez?" — "Me 'm bo an dra-mañ, me 'm bo an dra-ze..."

„Ar re a vo bet fur, eme unan, o devezo traou, c'hoariellou, avalou-orañjez, sukr-heiz; ar re a vo bet pennou fall n'o devezo netra!" — "...Ha me, warlene eme unan all, am boa bet em botez eur martinig hag eur penn-ognon!"

Darn a lavare eo ar Mabig Jezuz e-unan, diskennet eus an neñvou, a zeufe en o c'hamb da lakaat dezo leiz o botou... Evit darn all, eo eun tad-koz Nedeleg, gant eur vantell hag eur mell baro gwenn, a ziskennfe didrouz en o zi, dre doull ar siminal, e nozvez Nedeleg, da hanternoz.

Ar re vras a rae goap : "Kaoziou babigou, emezo! Penaos e c'hellfe eun den — deuet eus pelec'h? — ha pa vefe heñ eun tad-koz Nedeleg leun a c'hal-loud, en em zila ebarz siminaliou, ker moan all alies? Hag an uzil? Ha, gwasoc'h c'hoaz, tan flamm an eteo-Nedeleg? Ya, koñchennoù goullo, sur! Traou ijinet, kaoziou toull ha gaouiat, mat da baka genaoueien, ha netra ken!" Int-i a ouie, pell 'zo!

Hag ar brud, kredet-diskredet, da redek : "N'eus tad-koz Nedeleg ebet : ar mammou eo a lak!"

Ar gomz-se a oa deuet ganen d'ar gêr. Mamm a voe lakaet nec'het ganti : grosmol e klevs, hag e voe lavaret din groñs, ma talc'hfen da vruda diotachou a seurt-se, desket din gant paotred vras ar skol, ne deufe ket an tad-koz ha n'am befe netra em botez da Nedeleg.

Savet e oa diskred ennoun.

Ha koulskoude e soñjen : ma vefe ar gwir gant va mamm? Hi a gasae kement ar gaou ma ne felle dezi klevet diganen, ken alies ha bemdez, netra nemet ar wirionez. Ret oa kaout fiziañs enni! Daoust da-ze, e ruilhe atao dre va spered kaoziou paotred vras ar skol.

Da Nedeleg edo ar c'hiz e Montroulez da gas ar vugale betek an ilizou da welet ar c'hrevier. Bep bloaz, soñj am eus, mamm ha me a bigne gant an hent serz a gas da goent ar C'harmel. Eno, er japel, e oa eur c'hraou dispar, graet holl e koar : kañvaled, gvez palmez, perokeded ha marmouzed, lennou-dour, mesaerien gant o deñved, rouaned, eur bed a dud haga loened a leune, tro-dro d'ar C'heo burzudus, bodet ennañ ar Familh zantel en he fez. Labour al leanezed oa, frouez o ampartiz hag o fasiañted.

Er gêr, diouz an noz, e kempennen va botou-koad, ha goudeze e lakaen anezo dirak an aoled, araok mont d'am gwele.

Er bloavez-se avat, da noz Nedeleg, eo e gwele va mamm ez is. Divorfila a ris pa hejas va skoaziou : „Yannig, selaou! emañ o tont... Klevet a rez?"

Strafulhet o klevet trouz, fich-fich pakadou ha paper chich-chaoget, e c'houlennis ouz va mamm a vouez izel : „Mamm, n'eo ket logod eo?"

Nann, disheñvel oa an trouz. Diwar dorn eun den e teue an trouz, sklaer oa!

Hag e keit-se, va mamm a lavare din : „Ac'hanta, klevet 'peus? Premañ e kredez da vihana?"

Ha me a grene hag en em starde ouz va mamm :

„O ya, mamm, emeve! Kredi a ran, kredi a ran!..."

Bloaz war lerc'h : deuet oa Nedeleg adarre.

Evel boaz, e voe savet ar c'hraouig war gorre ar gomodenn goz, war eur gwelead kinvi. Ar Mabig Jezuz, ar Werc'hez, sant Jozef, ar vesaerien hag an tri Roue, hep ankounac'haat an azen hag an ejen, hag ar sined war neuñv war eun tamm sklasenn a rae heñvel ouz eul lenn : holl e oant eno, dindan eur volz paper rouz, lakaet d'ober ar c'heo santel.

Bemnoz, er bloaveziou araok, e oa bet eun dudi evidoun, gwisket em roched-noz hir, pignat war eur gador harp ouz ar gomodenn, da lakaat tan war ar goulaouennou bihan a bep liou. Lavaret ganen va fedennou, e c'houezen ar gouleier bihan, unan hag unan, ha yao d'am gwele da huñvreal, araok chom kousket, er pezh a vefe degaset din eus an neñv.

An dro-mañ avat, dre ne oan ket bet fur gant mamm, e kavis va botez peuz-c'houllou : eur penn-ognon a oa ebarz, eur martinig ler hag eul lizer-tamall, skrivet gant liou ruz ha sinet gant an tad-koz Nedeleg e-unan.

Al lizer-ze a yeas ganen d'ar skol. A dra zur, eun tammig mez am boa ouz hen diskouez : met ar garantez evit ar wirionez a voe trec'h ennoun. Pell awalc'h am boa stourmet ouz gevier ar re vras : etre va daouarn edo bremañ ar brouenn : gant ar mammou eo ez edo ar wirionez! Eun tad-koz Nedeleg a oa, beo-mat, pa skrive lizerou a seurt an hini a oa ganen.

Paotred vras ar skol a c'hoarzas goap ouzin, ken-ha-ken, e-kreiz va daou-lagad, ha lakaet sot e voen ganto.

Siouaz! Pa gontis an abadenn d'am mamm, pebez bir a zankas em c'halon, ouz klevet diganti edo ar wirionez gant ar baotred vras... Neuze e kontas din penaos e oa deuet a benn eus he zaol, er bloaz araok, evit m'am bije kendalc'het da gredi. Eul las he doa staget ouz eun tamm paper e-touez ar c'hoariellou, er siminal. Al las a dremene goudeze dre zindan an armel a oa etre ar siminal ha gwele va mamm, hag e oa ar penn ganti en he dorn. Bep ar mare, he doa chachet war al las, graet trouz gant ar paper... ha va zouellet a zoare!

N'ouzon dare penaos e c'hoarvezas ganen kas an tan da bega e paper va c'hraouig, en eur lakaat ar gouleier war elum... Ma rankas va mamm teurel pep tra er siminal, buhan, gant aon na grogfe an tan en ti...

Evel paper va c'hraouig Nedeleg, ez ae ive va huñvreoù da ludu, ha, da heul, ar fiziañs am boa lakaet betek neuze e komzou an dud, ha dreist pep tra e re va mamm. Ker bras eo bet va dizouezenn, ker beo all eo chomet atao ar zoñj anezi em spered, ma ris va zoñj pell 'zo : ar pezh a reas din va mamm, — hag hi o kredi marteze ober mat! — birviken n'her rafen d'am bugale!

Ha chomet oun feal d'am ger!

KERLANN.

C'HOARIOU

DA ZIBUNA WAR AR GOUELIOU.

Divinadennou : (degaset gant an Ao. Larvor).

1. — Pev ar baou keinet,
ret d'an den skruizet.
Piou en deus divinet?
2. — Daou zorn e daou zorn,
Daou baou hag eur rod.
3. — Petra hor gouzout diouz an avel
Hep hon diwall diouz an heol?
4. — Pehini eo brasa labous ar bed?

Gerlou-kroaz al Lagad-du, n° 8 :

- A-blaen :
1. — Tomma reas ar Mabig Jezuz. — Gortozet abaoe Adam
 2. — Ano an dudiusa. — E " DARVOUD "
 3. — Meur a hini. — En o zi eo ganet Jezuz.
 4. — Al loen milliget, lakaet freuz ennañ gant Nedeleg.
Eus ar verb " beza "
 5. — Kemmet, ne voe kavet hini gant ar Familh zantel.
 6. — Ac'hano e teue an Aelez da noz Nedeleg.
Ar pezh a reas ar Vajed pa weljont ar steredenn.
 7. — Da gas kouignou Nedeleg d'an traoñ, e Bro-Zaoz.
A vez graet en ilizou. — Eus " beza "
 8. — Gwez. — Eus " mont " — Unan eus bugale Noe.
 9. — Evit merka eul lec'h pell. — E kichen Jezuz,
nann d'e C'hiniwelez, met d'e varo.
 10. — Ennañ ec'h hader an avalou-douar. — E " nann "

	1	2	3	4	5	6	7	8
1	K	E	M	P	E	R	A	D
2	O	B	E	R	I	O	U	
3	R	E		I	L	L	U	R
4	O	U	R	Z	A	L		O
5	L	L		O		A	E	L
6	L	I	E	N		D	A	L
7	E	E		I	N	O		A
8	R	N		A	O	U	R	

Gerlou-kroaz al Lagad-du, n° 7

Divinadennou Niv. 8

1. — Diou renkennad dent hag an
teod, er c'henou. — 2. — An tach.
3. — Al lagad.

A-zerz :

1. — Ar bastored o c'hlevas o kana. —
Ar micherour-mañ ne labouras ket
war graou Bethleem.
2. — Frouezenn vihan, a ro blaz da
" larnbig " Nedeleg.
3. — Heñ ivez a dommas Jezuz. — Re
e tañvas ar gwin kenta.
4. — Da zeski deomp e garout eo deuet
Jezuz. — E " Nouel "
5. — An ebestel a ra kement-se.
6. — Devez an Aotrou Doue. — Per-
son-kanton.
7. — E stad da veza eostet. — Evelse
oa an Diaoul da zeiz Nedeleg,
m'en doa skiant awalc'h!
8. — Evito eo deuet Jezuz.
9. — A dalv " evez " warlerc'h ober.
— E " Nedeleg ", diou gensonenn
(consonnes).
— Selaouit hini ho kleier.
10. — Bezit atao " warnañ "... — Ne oa
hini ebet war ar C'hraou.
11. — Ouz ar c'harr. — Penn ha dibenn
" Adam "

DESKI! BREZONEG!

Lavarit :

Yann en deus torret e c'harr en eur lammat eus e garr.

Lavarit ivez :

Chan he deus torret he gar en eur lammat eus he c'harr.

KERLANN.

LEORIEREZ SANT-KAOURINTIN

J. Guivarc'h mab

Straed Kereon, KEMPER

Teleph. 7-03

Levriou - skol

Pep tra evit ar skolidi
hag ar bureviou

Levriou - oferenn

Levriou - kan

Levraoueg

Poupées. Broderies

Le MINOR

Pont-Sabbé

Bretagne

Lans da Vicheriou ar Vro

Mark ar Berr "à la Ville d'Ys" (Ker-Is)

16, Boulevard Kerguelen (e-kichen ar Post). — KEMPER

Pour Tout
ce qui
concerne
la PHOTO

POUILLOT-EHANNO

PONT-L'ABBÉ Téléph. 1-21

ON SE DÉPLACE SUR DEMANDE

POMMES de TERRE - GRAINS - ENGRAIS - FOURRAGES

Alain PÉRON

57, Rue Ernest-Renan, PONT-L'ABBÉ (Finistère) — Téléphone 24



LIBRAIRIE LE DAULT

16 bis, Rue René-Madec - QUIMPER

LIVRES - GRAVURES - ANCIENS & MODERNES
Tout sur la Bretagne

Achat de Livres (et de vieilles reliures)
se rend sur place à ses frais

Imprimerie Centrale de Bretagne

EDITIONS
REVUES
PÉRIODIQUES

PROGRAMMES
TOUS TRAVAUX
COMMERCIAUX

36, Rue Richard-Lenoir
RENNES

Kornig ar Merour

Lennerien gêr.

Hôr c'helaouennig a zo aet en he eilved bloaz. Setu niverenn genta 1949, deuet er-mêz, ha mall ganti kas d'eoc'h a bep-seurt reketou mat evit goueliou Nedeleg hag ar bloaz nevez.

He youl eo, evel pep krouadur bihan, kreski ha mont atao war wellaat. Met, skler eo n'hellou hen ober, nemet ha kendere'hel a rafec'h e'houi d'he harpa a bep tu.

Her gouzout a rit, meur a zoare a zo d'he harpa.

Ret eo da genta aoza boued mat eviti : an dra man eo karg ar rener hag ar skrivagnerien...

Ret eo d'an eil karga yalc'h ar merour. Heman, siouaz d'ezan, n'en deus kavet tenzor ebet hag a jom atao paour hag ezommek. Setu perak e c'hou-lenn diganeoc'h paea ho kourmanant kenta ma c'helloc'h (ma n'ho peus ket graet c'hoaz) ha klark d'ezan lennerien nevez.

En deiz m'hor bezo muioc'h a lennerien e c'hellimp ive diskenn ar priz.

A-vreman, e trugarekaan, a galon vat, ar re o deus digaset d'eomp o skodenn hag o aluzenn.

Arabat d'ezo kredi e vent pedet da baea diou wech, warz igarez ma rese-vint hor paperenn ruz.

Konta reomp warnoc'h : Ra blijo gant an aotrou Doue, an Itron Varia, ha Sent hor bro Breiz rei d'eomp Goueliou Nedeleg laouenn. ha bloavez mat.

M. Laurent Bleunven,

recteur de Plomelin, par Quimper (Finistère). — C. C. P. 1266-53 Rennes.

Deiziadur Breiz 1949

Treset gant Xavier Langleiz ha moulet gant ar gelaouenn vrezonek "Al Liamm..."

Gwerzet evit ugent lur ar skouerenn.

Her goulenn digant : P. Le Bihan, 6, rue du Marechal-Joffre, Ver-sailles. — C. C. P. Paris 5349-06.

Eus 1 da 5 skouerenn, lakaat 10 lur ouspenn ar priz.

Evit ouspenn 5 skouerenn, lakaat 10 %, ouspenn ar priz.

Ar c'helc'hiou ha kevredigeziou breizat hag ivez ar re o devo prenet d'an nebeuta 50 skouerenn, n'o devo ket da baea ar mizou-kas.

EUN EURED HANTERKANT VLOAZ

D'an 3 a viz du, kleier Gwitalmeze a gase, dre bevar c'horn ar barrez, o ekleo laouen.

En iliz-se, oant deuet enni, d'ar 25 a viz here 1898, evit skoulma o buhez an eil ouz eben, Jakez Guenneuguès ha Mari Gloâtr, eus Kersimon, a yoa distroet evit trugarekaat Doue eus an holl grasou resevê, epad an hanterkant vloaz, m'oant bet asamblez.

Ar merk brasa, oa kouezet bennoz.


Doue warno, eo ar gurunennad ker kaer a vugale hag a vugale vihan, a oa en-dro d'ezo hag a ganas ker bras edoug an ofis.

An ao Bleunven, merour Kroaz Breiz, a reas meuleudi o buhez a feiz hag a labour; an ao. Taniou a greskas levnezh an holl dre ar bomon muzik, a lakeas ar c'halonou da dridal.

Ra blijo gant Doue o miret c'hoaz, epad pell, yac'h, ma c'hellint gwelet gant plijadur bugale o bugale vihan o kreski.

Ar merour : M. l'Abbé BLEUNVEN
Recteur, PLOMELIN, par Quimper

Ti-Moulevez Kreiz Breiz
36, Rue Richard-Lenoir, RENNES



Bloavez mat!

(War don : " Salud, Breiziz ", e trede levr Sonieù Feiz ha Breiz)

Diskan.

A-berz Doue,
eur bloavez mat
da bep Breizad!

1. Salud Breiziz, gant karantez!
Eur bloavez mat ha levenez!
2. Tud an Arvor, tud an Argoad,
laouen, deoc'h holl, eur bloavez mat.
3. Eur bloavez mat d'al labourer,
eostou druz d'e barkeier.
4. Bloavez pesked d'ar pesketour ;
Bloavez arc'hant d'ar micherour.
5. D'ar paotr yaouank, d'ar plac'hig koant,
eun dimezi, hervez o c'hoant.
6. D'an daou bried, bugale vat,
e-leiz an ti d'o laouenaat.
7. Da bep kristen, Feiz start ha krenv,
ha kurunenn eun deiz en nenv.

Laouenanig Breiz.